

D'ar 7 a viz Mezheven

- E 854, e Kordoba, merzherenti **ar sent Pêr**, beleg, **Wallabonz**, diagon, **Wistremond**, **Habenz ha Jeremias**, menec'h, dibennet gant ar vMaored.

- E 1152, **sant Jilberzh**, abad. Hag eñ aotrou e Bro-Alvern, ez eas da benitiour hag e tiazezas abati Premontred Neuffontaines gant un ospital.

- E Breizh, e 666, **sant Meriadeg**, eskob Gwened.

Ganet e kreisteiz Kembre eus un tiegezh uhelidi, e tilezas leveoù uhel evit mont da vanac'h. Gant ar manac'h Gwinier ez eas da Gernev-Veur a-raok treuziñ Mor-Breizh ha dont d'an Arvorig da ren ar vuhez penitiour. Da gentañ e savas e beniti e Traon-Meriadeg, hiziv Sant-Yann-ar-Biz e Bro-Dreger ha da-c'houde en em stalias e Stival, e traonienn ar Blavezh, nepell diouzh Pondivi. Diuzet e voe da eskob Gwened e 659.

- En Iwerzhon, war-dro 550, **sant Koulmog** pe **Koulman**, abad hag eskob kentañ Drom Mór e kontelezh An Dúin (Down).

Ganet e Daldaria e voe desavet gant sant Aelvev eus Emly e Nendrum war enezenn Mahee. Sevel a reas ur gumuniezh menec'h e-kichen stêr Lagan hag unan eus e ziskibled vrudetañ a voe sant Finnian Magh Bile pe Movilla.

D'an 8 a viz Mezheven

- Er I^{añ} kantved. **sant Maksimin**, ezel eus strollad an daouzek diskibl ha tri ugent, hag hevelebet, en hengoun, ouzh melestrour tiegezh Bethania.

Gant Lazar hag he c'hoarezed e vije deuet war ar vag o c'hasas da vMarsilha war-dro ar bloaz 42. Kregiñ a reas neuze da avielañ Bro-bProvensa gant santez Mari-Madalen. En Ais de Provensa e savas ul lec'h pediñ, e-maez eus kêr, hiziv e nev dehoù iliz-veur Sant-Salver. Eskob kentañ Roazhon e vije bet e darempred gant abostolerezh sant Fulub ha sant Lukaz.

- E 560, e Pikardia, distro da Zoue ene **sant Mezar pe Marzh** (e galleg : Médar), eskob Noviomago (Noyon).

Hag eñ diskibl sant Remi, e voe diuzet da eskob Vermand e-kichen Sant-Kintin. Staliañ a reas e sez e Noviomago goude freuzioù an aloubadegoù barbar. Eno e tegemeras ar rouanez santez Radegond a reas he gouestloù dirazañ. Avielañ a reas Bro-Flandrez. Brudet e voe evit e vadelezh hag e vrokusted. Meneget eo e Levr-dielloù abati Landevenneg.

- E 1154, **sant Gwilherm**, arc'heskob Evrog.

Hag eñ niz da roue Bro-Saoz e voe diuzet da arc'heskob York met buan e voe lakaet an drouk-c'hras warnañ. A-hed seizh vloaz e c'houzañvas gant habaskted ar mezhekadurioù a baouezas a-drugarez da emell ar pab. Santelezh et eo bet e 1226 e Roma.

- E 1896, **sant Jacques Berthieu**, beleg, Jezuist, ganet e Saint-Flour en Alvern, merzher kentañ Madagaskar.

- En Iwerzhon, er V^{vet}-VI^{vet} kantved, **sant Bron**, diskibl sant Padrig, eskob-manac'h, a roas e anv da *gCill Easpaigh Bron* ("Iliz an eskob Bron").

- En Iwerzhon, **sant Morgi**, manac'h.

- E Plouarzhvael en eskopti Sant-Mac'hloù, e 1636, **Mamm Mari a Sant-Paol** (Louise de Mason), d'he fevar bloaz warn-ugent, leanez, kevrinourez.
Kalz burzhudoù a voe lakaet war e hanterouriezh goude he marv.

D'an 9 a viz Mezheven

- War-dro 302, e Antiokeia, d'he femzek bloaz, merzherenti **santez Pelajia**, gwerc'hez, bet meulet gant sant Yann Grizostomos.

- E 373, en Edesa (hiziv Urfa e Turkia), distro da Zoue ene **sant Efrem**, diagon, Doazhour eus an Iliz.

E Şôbâ, hiziv Nusaybin, e voe karget da gentañ da brezeg ha da gelenn ar gelennadurezh santel ha goude aloubadegoù ar bPersed e kavas repu gant e ziskibled en Edesa lec'h ma tiazegas ur skol doueoniezh. Hag eñ doueonour ampart e oa ivez barzh donezonet kaer hag e savas meulganoù niverus d'ar C'hrist ha d'e Vamm, ar pezh a dalvezas dezhañ "Telenn ar Spered Santel" da lesanv.

- Er IV^{re} kantved, e Persia, da vare heskinadeg ar roue Sapor II, merzherenti **santez Tekla hag e c'heneilezed Marianna, Martha, Maria hag Ennatha**.

Gwelout a rejont o zad speredel an Tad Paol o nac'hañ he feiz hag e voent jahinet ha lazhet gantañ e-unan.

- E 1837, e Roma, **ar wenvidigez Anna-Vari Taigi**, mamm a diegezh, kevrinourez.

Daoust da feulster he gwaz e voe evezhiek outañ hag e tesevas o seizh bugel war un dro o reiñ skoazell speredel ha danvezel d'ar beorion ha d'ar re glañv.

- En Dalriada, e 597, **sant Koulmkell pe Koulm**, abad Iona. Gant sant Padrig ha santez Berc'hed emañ e-touez diazeourion bennañ Iliz Iwerzhon.

Ganet eus gouenn rouaned an enezenn, e voe stummet eno war ar vuhez vanac'h. Goude bezañ diazezet ha renet meur a vanati e tivroas gant daouzek manac'h. Redek a reas ar morioù o klask gounid ar bPikted d'ar feiz ha lakaat peoc'h etre ar rouaned. War enez Iona, en Inizi Hebridez, en Dalriada (kornôg Bro-Skos), e tiazegas un abati a voe brudet evit buhez reoliet ar venec'h hag o aked evit ar studioù. Eno e varvas goude pevar bloaz ha tregont a abadiezh.

- Er VI^{vet} kantved c'hoazh, **sant Siolnan**, manac'h e Skos gant sant Koulmkell.

- E 1794, e Pariz, merzherenti **an Aotrou beleg François Cormeaux**. Genidik eus Lambal, e oa beleg misioner hag e labouras start en eskobiezhoù Sant-Maloù, Sant-Brieg ha Treger. Dre ma nac'has Bonreizh Trevourel ar Gloer e voe harzet. Barnet ha kondaonet d'ar marv e voe dibennet e 1794. Lezet en deus oberennoù a zeoliezh a zaspazhe da-geñver ar misionoù.

D'an 10 a viz Mezheven

- War-dro 656, distro da Zoue ene **sant Landri**, eskob Pariz, diazeour al Leti-Doue (an *Hôtel-Dieu*).

- War-dro 666, **sant Ithamar**, eskob Durobriavae (Rochester), an hini kentañ eus Bro-gKent a lakaas da skediñ dellezegezh e vuhez hag e ouiziegezh..

- En IX^{vet} kantved, merzherenti **santez Olivia**, gwerc'hez kehelet e Palermo.

Hervez an hengoun, ne oa nemet 13 bloaz pa voe skrapet ha kaset da gKartaga pe c'hoazh da dTunis.

- E Breizh, **sant Kidiav**, eskob-abad.

- E Bro-Skos, er VII^{vet} kantved, **sant Sewenn**, beleg eus Inverleith (Lothian).

Meneget e vez gant ar pab Honorius I^{añ} en e lizher da iliz Breizh a-zivout deiziad ar Pask. Roet en dije e anv da barrez Sant-Sewenn nepell diouzh Anast en eskobiezh Sant-Maloù.

- E Breizh, e 1081, **sant Yann**, abad Kemperle war-lerc'h sant Gurloez.

- En Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **sant Iollan**, eskob Rathlihen.

D'an 11 a viz Mezheven

- War-dro ar bloaz a c'hras 61, e Salamin e Kiprenez, **sant Barnabaz**, Abostol. Hep bezañ bet e-touez an Daouzek ez eo bet roet dezhañ an anv a *abostol* dre m'en deus bet ur roll a-bouez e penn-kentañ buhez an Iliz. Gant e vreur Zebedea - alias Aristoboulos pe Arwestl - e vije deuet da avielañ Breizh-Veur.

Eñ eo a ginnigas Saoul eus Tarsiz d'an Ebestel, er c'hasas da Antiokeia hag e ambrougas en e gefridi gentañ en Asia-Vihanañ. Emellout a reas e Senez Jeruzalem ha distro d'e vro Kiprenez e skignas eno ar feiz. Kv parrez « St-Barnabé », Pentevr

- War-dro 360, **sant Maksim**, eskob Napoli.

Harluet e voe gant an impalaer Constantius dre ma chomas feal ouzh Kredo Nikaia ha ma nac'has degemer kredenn Arius.

- E 1298, e Gniezno e Polonia, **santez Yolen**, merc'h roue Hungaria Bela IV, nizez santez Elisabed Hungaria, c'hoar santez Kinga.

Goude marv he gwaz, an dug Boleslas an Deol, e tilezas he holl vadoù hag e reas gouestloù en Urzh Santez-Klara lec'h ma voe abadez.

- En Ilizoù ar Reter : **kounidigezh merzherenti sant Bertele**.

- E Breizh, er VII^{vet} kantved, **sant Majan pe Madian**, abad, ganet e Breizh-Veur, mab sant Tudon, breur sant Gweznou ha santez Tudonia, penitiour e Lokmajan war barrez Plougin e Bro-Leon.

- En Iwerzhon, e 881, **sant Riwal**, manac'h e Bangor.

- E Bro-Skos, er VII^{vet} kantved, **sant Herebald**, abad. Lod a lavar e voe diskibl sant Fursa ha penitiour e Breizh.

D'an 12 a viz Mezheven

- War-dro 400, **sant Onufr ar Bras**, penitiour en Egipt, Patrom ar wiaderion.

Er gouelec'h nepell diouzh Tebaid e vevas e-doug 80 bloaz, er brasañ emziouer, gwisket hepken gant e vlev.

- E 816, e Roma, **sant Leon III**, pab, a roas da Karloman, roue ar C'hallaoued, kurunenn an impalaeriezh, hag a stourmas evit difenn ar feiz wirion er C'hrist Mab Doue.

- E 840, **sant Odolf**, beleg, abostolour Bro-Friz, a skoazellas sant Frederig.

- E 1070, merzherenti **sant Eskill**, eskob e Bro-Sveden.

Genidik eus Breizh-Veur e pleustras e abostolerezh e mervent Stockolm. Evel ur pastor gouestlet penn-da-benn d'e zeñved e roas e vuhez evito.

- E 1247, **sant Guyon a gCortona** (Gl. Guy), beleg frañsezat.

Hag eñ perc'henn war un domani bihan e roas degemer brokus ha gredus da sant Frañsez Asizi ha d'e genvreudeur. Mont a reas d'o heul hogen en em dennas en ur mougev eus Cortona o prezeg ar binijenn d'an dud.

- En Iwerzhon, e 1138, **sant Kristan**, (Iw. Criostán pe GiollaChríost), eskob Clochar, breur sant Malac'hi Armagh.

- E Bro-Skos, er ^{V^{vet}} kantved, **sant Ternan**, abad hag eskob, abostolour ar feiz e-touez ar Bikted.

D'an 13 a viz Mezheven

- E 399, **sant Evagr ar Pontos**, beleg, manac'h.

Goude bezañ servijet iliz Kaezarea en em dennas e goulec'h Nitri en Egipt dindan renerezh sant Makaer hag e skrivas oberennoù doueoniel talvoudek.

- E 1138, e manati Clairvaux, **sant Jerar**, breur sant Bernez, manac'h.

Ne oa ket ul lenneg anezhañ hogen e tiskouezas kalz barregezh ha lemmded spered.

- E 1231, **sant Anton a bPadova**, beleg frañsezat, doazhour eus an Iliz, burzhudour brudet er bobl gristen.

Ganet e Lisboa e Bro-Bortugal e oa chaloni reoliek pa 'z eas da Asizi e touez diskibled sant Frañsez. E zonezonoù dibar a brezeger a reas dezhañ bezañ kaset da vMaroko met buan e voe advroet abalamour da wander e yec'hed. Prezeg a reas avat e Lombardia hag e Bro-Lemojez lec'h ma tiazegas kouent Brives. E brezegennoù leun a guñvder a oa pinvidik enno menegoù ar Skritur Sakr. War urzh sant Frañsez ez eas da gelenn an doueoniezh e Padova lec'h ma varvas e 1231 goude bezañ prezeget eno ar C'horaiz.

- En Enezenn Vreizh, **santez Eurgain pe Eurgan**. Hervez an hengoun e vefe merc'h Karatakos bet gonezet d'ar feiz gant sant Paol Abostol ha distro da Vreizh e 57 gant 12 kristen e tiazegas iliz Cor Eurgain nepell diouzh Llanilltud Fawr er Glamorgan, lesanvet *mamm iliz Breizh*. Koulskoude e vevas kentoc'h er ^{VI^{vet}} kantved. Kv parrez « Calorguen », bro-Orc'h, eskopti Sant-Mac'hloù

- Er ^{VI^{vet}} kantved, **sant Tuno** (Kb. Tudno), feizvonnour e Kembre (Llandudno) en deus roet e anv da barrez Pludunoù e Breizh.

- En Iwerzhon er ^{VI^{vet}} kantved, **sant MacNois**, Abad Clúain Mhic Nóis.

- En Iwerzhon, **santez Damhnath**, maouez santel.

- E 589, **sant Salmad**, penitiour iwerzhonat e Eymoutiers (Bro-Lemovicas).

